

Cantic ar Barados.

DISKAN :

*Barados dudius
Bro ar zent eo va bro,
O pegen eürus
E vezimp eno ato !*

Eus ar hed-ma poanius
Peur e zin-me d'an Envou !
Pell diouzoc'h, va Jesus,
N'eus nemet poan ha daelou.

O pegen glac'harus
Eo beva gant ar pec'het !
Peur eta va Jesus
Peur 'hellin-me ho kuelet !

Nos ha de va Jesus
E lavaran o vouela :

Peur er hed-ma poanius
Echui va heur diveza !

Skuiz ha melkoniet
En draonien-ma a zaelou
Plijet Jesus plijet
Va diguemer en envou !

Neuze e tremeno
Ar hoan, ar spont, an anken.
Neuze me a gavo
Ar peoc'h, ar joa da viken.

O peoc'h ha joalisted,
Va Jesus o va Doue,
O pebeus eürusted
Epad an eternité.

INDULJANZ AR MARO MAD

Hon Tad Santel ar Pab hen deuz bet ar vadelez da lakât Induljanz braz ar maro mad kalz aesoc'h da c'hounit. Peb hini a c'hello breman gounit an Induljanz-se, epad zoken ma vezo c'hoaz var he yec'hed, hag e talvezo dezhan a benn ma rento he ene da Zoue. N'euz ken d'ober nemet mont da govez ha da gommunia (d'an deiz ma karer) ha, goude beza kommunit, kana pe lavaret devot ar beden-ma :

Ton : *Elez euz ar baradoz.*

O va Aotrou, va Doue, n'euz forz pe seurt maro
A garot choaz evidoun, me fell d'in hen reseo ;
Euz ho tourn, a greiz kaloun, m'en reseo a-vrema,
Gant holl anken ha poaniou va amzer diveza.

